



# BEC'H D'AR GALLAOU

WAR DON : *Eur plac'h a zavaz beure mad.*  
(Eus sonio Marc'harit Fulup).

Fanch A - ra - - bad hag e vi-  
gnon oa 'tont deuz ker, de eur par-  
don. Tra la la la la ra la la ra lamp tra  
la la la la la ra la

Fanch Arabad hag e vignon  
Oa 'tont eus ker, de eur pardon.

### DISKAN

*Tra la la la la ra la la ra lamp*  
*Tra la la la la ra la.*

Pa gavchont pevar c'hrak-otro  
Bet o vale war ar mezio.

Ar re-man 'douge liviten,  
Tok kern uhel war grap o fen,

Chupen lost-pik ha bragou-sac'h  
Ken distum ha broz euz goz wrac'h.

O moustacho a oa siret,  
Frizet, tronset ha pomponet.

Ha 'n o dorn 'doa beb a vaz skan  
A gasent en dro 'n eur ganan.

'Dal ma welchont hon daou bôtr mat,  
'N em lakchont raktal d'o goapât,

Da ganan 'bouez-pen ar zôn skwiz  
Anveet ken mad gant keriz :

« Les pommes de terre pour les cochons,  
Les épluchures pour les Bretons. »

— « Arabad 've, 'me Fanch raktal,  
Lezel chas Gallaou da harzal,

Ha d'ober gwap ouz Bretoned  
Pa 'man mab ma zad war ar bed.

Chom d'am gortoz 'ta aze, Per,  
Ha me 'ya da domma d'o ler. » —

Mond 'ra 'trezek d'ê goustadik,  
Kregi 'ra 'n eur chupen lost-pik,

Hag e sko ken stard gant eun all  
Ken 'c'hent en toufle da ruilhal.

'N drede, gant eun taol troad 'n e rer,  
A lamm dreist d'ar c'hleuz 'bars ar ster.

— « Han ! 'me Fanch, pevar vastrouilhek,  
Me 'zesko d'ac'h zerri ho pek,

Hag a ziskouezo d'ac'h piou ê  
Ar moc'h diouzimp pe c'houi pe me. » —

Ha Fanch neuze o vond d'ar ger  
'N eur ganan sôn ar pilhaouer.